

RECIT

Deus ar Maleuriou arruet en departamant ar Var

EN DRO DA SAINT-ETIENNE

OCCASIONET GANT AN ORACH AR 14 HAC AR 15 A VIS EVEN DREMENET

Jesus, ma Salver adorabl,
Obtenet d'ho pec'her ingrat
Ar sclerijen da discleria
D'ar Vretonet dre ar vro-ma.

Speret-Santel deus an env.
Gret d'in esplican eb dale
Ar suit demeus ar maleuriou
Hac an darn deus ar miracloù

Quement-mâ so bet arruet
En departamant Var hanvet.
Dre deluch dourr curuno.
Hervez ma raport ar c'helo.

Ma speret so epouyantet
Ha ma memoar so troublet
O touel da sonjal esplican
Eur malheur an effroyaplan

Eun illis hanvet Sant-Germain,
Eun templ santel d'ar gristenien
Gant ar c'huruno attaquet,
Etre ma oa en ofern bred.

Habitantet leis an illis
A voa o assistan en offic;
Den neus gallet sortian;
Oll o deus renquet perissan

An douar a deu da grenan
Hac a ra d'an illis coezann
Var gein quemend a voa enni,
En eur momet, d'ho ecrasi,

O ma Jesus ! tristant malheur !
Dre ur merq dimeus ho couleur
Perisset tud en ofern bred
Pep ma so hini sortiet.

Totaliset gant tud savant,
Var ar bord pevarzec kant
A voa en illis biniget,
Hac a so devet ha beuet.

Nebetoc'h evit eur c'hard heur
Goude ma voa fin d'ar malheur,
En plaç an illis so cavet
Eur stang hir ha ledan meurbet.

Flottanç ar caera batimant
So cavet a donder er stang ;
A c'hoas e lavar ar scritur
Ne dap quet ar fonce ar mesur

Pedomp Doue ar vir galon
Da accordin deze pardon
Ha d'o laqat oll da repos
Er gloar demeus ar barados.

An autro Richard, deus e di.
Dious e tud o qimiada,
A guemas e diadre
Da vont da ober eun dro chasse.

Pa voa et dec pas dioute,
E return en dro adare,
Hac a lavar n'eur guir cren
Adieu, ma zud evil biquen.

An itron, o clevet anezan,
A commença da hirvoudan ;
Perac, ma bried, emezi.
E teut cren d'ho abandoni.

Evel ma hantre er c'hoat bras,
An dour varnezan a deuas,
Hac en em retir heb appel
E appu, er span eur roc'hel.

Assambles gant an dour couran
E commenç un tan violant,
An tempest hac ar c'huruno
Quen o sonje a voa maro.

Pardon, ma Doue, emezan,
Aman e renquant perissan,
Eb gallout en em repuin
Ha bean cals a vado din

En eur sevel var eur garec,
E meus bet apercevet
An tan coet dious an evo
Vaç a noblanç hac e vado.

O pebes desolation
A antreas en e galon
Guelet consommi e vado
E vreg ha e vugaligo !

An itron, o velet an amzer,
A supplias prest e mevel
Da voned da glasq he bried,
Mar guie pellec'h e voa eet.

Evel ma c'hantre er c'hoat bras,
Souden gantan e erruas,
E appu a span eur roc'hel
Hac e disposet da vervel.

Sevet ma mest paour ; emezan,
E oc'h var ar poent da perissan.
Gant Doue e eo preservet
Ho bugale hac ho bried.

Respont a eure d'e vevel
E lezel eno da vervel,
Pa oa consommet e vado,
E vreg hac e vugaligo.

Renquout a ra touet dezan,
Quen men deus credet anezan,
A voa preservet gant Doue
E bried hac e vugale,

Gant cals a boan hac a courrac'h
E teujont er mæs ar c'hoat bras
En dour betec o diou gazel,
En otro-ma hac e vevel.

An otro so n'en vuestet
Dre ur mirac'le vo rentet
E quidgen gruio a vezen
Nevoa e tud evit souten.

Pa voa gant e tud o barlant,
E teu var e lerc'h un torant
Hac a vezena voa ennan
Neus groet dezan perissan.

Chetu i chomet intanves
Ha hi leun a trididigues,
Er vocen gant e zri buguel
Hac i disposet da vervel

Pa eo bet bolonte Doue,
E eo et an dour ac hane,
Hac in sicouret da disquen
Gant Doue hon mest souveren.

C'hoec'h heur ha tregont a amzer
In bet er voezen en mizer
Da soulagin ho c'halono
N'ho doa nemet an delio

Ar mest a commande er fo
An otro Sevenis hano,
A voa attaquet gant an dour,
Eb gallout dont da n'em zicour.

Prozterni a ran dan dâolin
Da supplian hon Mest divin,
Hac hon Vam santel ar verc'hez
Da vezan e advocades

Mar sovetean va bue,
Ha ma ouvrierien a me
Me a savo eun ti a c'haeran
Evit ar pevien er vro-ma.

E nebutoc'h evit pemp minuten
Eo beuzet e ouvrierien,
Ar foageo varc'hadoures,
Tout in perisset assemblies,

Henor d'an otro Seveni,
Var an douar ha melodi,
Ha pa hei divar ar bed-ma,
Ar barados da jouissan.

RECIT

COMPOSET A NEVEZ

VAR UN TOL VAILLANTIS

ERRUET A DOST DA PARIS

AN 3 A VIS MEURS DREMENET

Var eun Ton Nevez

Me o ped assistantet da clevet recitan
Ma unan hon estonet dimeus a guemen-man,
Ar pez a zo arruet var ar c'hopi gallec,
Mar gallan gout ar leçon d'ho zrei en brezon nec.

Mes quent avanç davantach, e c'houllan sclerigen
Digant ar Speret-Santel da rimon pen-da-ben
Quement guir a so scrivet var ar c'hopi gallec,
Ha d'ho explican facil d'an oll en brezon nec.

Eur vreg yaouanc magueres o tistrei a Paris,
Het da guerc'hat eur buguel eus a dy ar Bourc'his
Da gass ganti da vagan en toes he bugale,
Evit sicour o zével ha gonit bara dè.

Dre eur c'hoat a renc tremen o vont da gaout ar gaer
Hac eo het attaquet, sivouas ! gant eur voler;
Hac en guisquet en bellec, o ton de bonjouri:
Ar goad en e goaziet a deu da remui

« Bonjour, eme an den-man; erru oc'h ma greg vad,
— Ha dec'hu pareillamant emei, outro n'abbat;
Souezet hon ous o goellet aman o paseal,
Rac ar c'hoad man so brupet da vean eun doull fall.

— Doue, eme al laër-man, a breserv pep hini;
Me so ama o vale d'a neun disanoi,
Hac e meus ma blijadur o c'hortos overnia;
Da larat ma breuvial na den d'am zroubla »

O kerzet en e c'hever en deus interrojet
Da c'houl a belec'h e teue ho pelec'h oa bet,
O voelet e voa ganti var e brec'h eur buguel
Hac en guisquet ar c'haera, casi evel eun æl,

Goude eun deus goulennet incontinant,
Ha ne devoa bet netra evit avançamant,
O quemeret ar buguel da zicour e soigni,
Da denna ar virione, ma galfe diganti.

Eus, emei, outro n'abbat, arc'hant a meus touchet
Cant livre a meus recevet evit e quemeret,
Nemert ma meus ar greden e collin ma bue,
Quet mont emes ar c'hoat man, au innoçant ha me.

— Na sonjet quet quement-se, emean, ma greg vad;
Me a vo dec'h compagnon da vont er mæs ar c'hoad:
E zoc'h gant ar c'habiten, n'hu pezo droug ebet,
Nemert ma renquet rentan ar pez o c'heus touchet.»

A zindan e soutanen e tennas eur zabren
Hac e savas auezi ractal a us d'he fenn:
Hac e c'houlennas ganti ar yalc'h pe ar vue,
Ha laret dezan pelec'h en deus laquet ane.

« Plasset ameus aneze eun dro d'ann innoçant;
Goel eo ganen ma bue evit aour hac arc'hant,
Caët a ret aneze o tout d'e zispako,
Ha lest ma bue ganen hac e hini gantan.»

Cregui a ra er buguel en eur memes instant,
Evit don d'e zispakan da guemer an arc'hant,
Dre permission Doue e tapas ar zabren
Ha gant eur tol, dre vonneur, en deus rannet e benn

Hep m'en deus bet an amzer da guemer an arc'hant,
E renqas mervel eno er plaç subitamant.
Hag ar vreg hag ar vuguel dre viracl so rentet
Voar an hent bras pareabl, hep m'ho deus droug ebet.

Tri gendam a erruas hac o deus goulennet,
O veled ar goad diouti, petra oa erruet.
Hac en deveus ispliquet diraze pen da-ben
En devoa lazet ar mest dimeus ar volerien.

« Dont a reet ganemp-ni emezo, var o quis,
Evit ma elfomp goelet ar merq ho vaillantis.»
Pa voue fouillet an den-man, eo e armo cavet.
Diou bistolen a daou den, eur sabren, eur sifflet.

P'ho devoa gret ho ingal hac o proces-verbal
Unan demeus ar gendarm a c'hoez enni ractal,
Hac en em rentas pevar deus e gamarado
Da velet o c'habiten var an douar maro.

Pa veljont an abijo e fellas d'he tec'hel:
En em rent a renquont pa deuan da vervel,
Ha lezel ho garroti hac ho c'has d'ar prison:
En Paris e recevont ho c'hondamnation.